

Uelen tri lenner nevez, na pa ne ve kén, na  
krenvoc'h e teufe da veza en eun taoll Nag  
a vad a c'hallfe da ober! — Trugare ivez  
d'ar re eus hon lennerien a gas d'imp embannou  
konverz. D'an holl varc'hadourien eus ar  
vro e vije mat rei d'imp embannou e lec'h  
fiziout anezo e gazetennou gallek na lenner  
ket war ar maez.

## Pregegen al labourer

*War an ton a gerfet, betek ma vo brao, ha  
kouet ha kaer*

Eul labourer koz, den Doue,  
N'eus ket gwell bell d'in a lere;  
«Diou wech bemde, da nebeutan,  
Me lar ma Fater», emean.

Ma Fater, 'mean, me a lar,  
Vel ma tle pob kristen, hep mar,  
Bemde, dirak ar Greuseufi  
Me 'lar anei gand tud ma zi.

Gand tud ma zi e taoulinan  
Deuz ar beure, dal 'ma saolan,  
Wit goulen bennoz ha zikour  
Digant Doue war ma labour.

Goude koan, pa ve deut an noz,  
'Rôk mont d'hon gwele da repoz,  
Ni 've daoulinet adarre,  
Da laret «gras» ha trugare.

Da laret gras ha trugare  
D'hon C'hrouer, an otro Doue,  
Pa n'eus deus an droug hon miret,  
Ha dreist pob tra deus ar pec'hed.

Na da betra e talvefe  
Bean labouret 'pad an de,  
Ma ne ve ket bet gras Doue  
'Tiwal anomp korf hag ine?

Ni a labour, gand kalz a boan;  
Mes piou a ra d'an treo diwan?  
Bennoz an Hini a zo Mest;  
N'eo ket hon labour 'ra an est.»

Da galz a dud c'houi 'ro kentel,  
Labourer koz, o den a boell!  
Mes d'in, en de-all, c'houi 'roaz  
Eun all hag a zo kaeroc'h c'hoaz.

Wit Pleuveuriz, me a garje  
— Pluen eur Barz mar am bije —  
Ma mignon koz, dont d'he riman

Me 'wel, dreist ar c'hleun, ar mor braz,  
A-uz d'am fenn 'man an oabl glaz;  
An oabl a-uz, ar mor e-traou,  
Piou 'ta 'neus o c'hrouet o daou?

An heol binniget o para  
A ro d'ar bed bue ha joa;  
War ar bed, kouls ha war ma fark,  
Piou a lak e lagad ken zart?

Kaer e gwelet, er parkeier,  
D'an here, dorn al labourer  
O tont, o vont gant an dachen,  
Hag, en eur vont, o skuilh ar greun

Nao miz goude, deut da welet,  
Er parkeier hag e welfet  
Ar vederien, ganto filc'hier,  
O vedi 'n ed er parkeier.

Tud a spered, c'houi hag a oar  
Ped mene a zo 'bars al loar,  
D'am c'helen, m'ho ped, deut breman,  
Rak azen 'on war gement-man.

C'hui, marteze, c'hallfe laret  
— Ma n'eo Doue — piou 'n eus roet,  
Ewit e boan, d'al labourer,  
Kerc'h du, eleiz, ha gwinez kaer?

Ar greun d'an here 'zo hadet;  
Dustu, en douar eo breinet:  
Penos e d'in gwelet breman  
War bop greunen kant 'wit unan?

O c'hoantat nac'h galloud Doue,  
Tud a spered vraz, tud dire,  
War an dra-man, 'meus aon, chom  
Ganac'h war c'houec'h eur ho ken...

N'eus dismegans ebet, m'hel lar,  
— Ha me 'zo koz war an douar —  
O rei meulodi d'hon C'hrouer  
Wit eur burzud a zo ken kaer.

Ar profed David a lere,  
Ha war an delen a gane:  
«An oabl, ar stered a ro gloar  
» Da Grouer ha Mest an douar;

» An eil de a lar d'egile:  
» Me 'zo krouadur da Zoue;  
» Pa dec'h an de, pa deu an noz,  
» An noz a gan ar momez poz.

» Netra er bed n'oufet da gat  
— «Mar pleer da jilaou erfat —  
» Ha ne ro e damm meulodi  
D'an Otro Doue... N'eus hini!»

(Achu 'r rouo David da gomz)

Al Labourer koz a gendalc'h :  
En Env, an Ele hag ar Zent,

eur plac'h ken santel. Doue r'he bennigo! »  
...Eur pennadig goude e oa maro.

Dre lizerou kavet gant ar paour kaez Patrik, e tizis da anaout hano ha chomlec'h e zousig Berc'hed. Skriva a ris da berson he farouz ha, goude lenn e respont, e chomis mui-ouz-mui sebezet.

Ar plac'h-ze a oa eur plac'h santel ha devotmeurbed d'ar Werc'hez. Skouer he farouz e oa, e gwirionez, ha priziet ha karet gant he ferson. En nozvez ma oa maro Patrik, eun hanter eur bennak en arak, e oa maro hi ivez.

N'em eus ket klasket biskoaz piou en doa telefonet d'in en nozvez-se, 'met, kredit sur, « me hen goar ».

Troet eus eur gelouen iwerzonek gant  
GWELTAS.

## AR C'HOUMANANCHOU

### Klaskomp lennerien neve da Groaz ar Vretoned !

Pedi reomp ar re eus hon lennerien, echu ganto o bloavez Kroaz ar Vretoned, da adnevezi o c'houmanant, ar c'henta ar gwella. Paour eo Kroaz ar Vretoned, evel ouzoc'h; n'he deus ken, da veva, nemet aluzennig ho koumananchou. Gant-se, lennerien ger, pa garit ho Kroaz viban, roit skoazell d'ezhi da veva. Ouspenn kas d'ezhi ho koumanant, klaskit d'ezhi koumananchou nevez. Ma karfe pep lenner kavout e-touez e gerent, e vignoned, e anaoudeien tri lenner nevez, ha pa ne ve kén, na krenvoc'h e teufe da veza en eun taoll Nag a vad a c'hallfe da ober! — Trugare ivez d'ar re eus hon lennerien a gas d'imp embannou konverz. D'an holl varc'hadourien eus ar vro e vije mat rei d'imp embannou e lec'h fiziout anezo e gazetennou gallek na lenner ket war ar maez.

Wit ober vad da bep-unan.

Pluen eur Barz me n'am eus ket.  
Koulskoude, gand aon ve kollet,  
Ho kentel vad, o ma mignon,  
Me 'skrivo 'nei gant ma c'halon.

Gant ma c'halon me he skrivo,  
Ha nep 'neus kalon a lenno  
Hag a zisko eur gentel vat,  
Da gaout zontj a Zoue dalc'hmat

Al labourer koz a gomz :

« Pac'h an d'am fark, deuz ar beure,  
M'arnez, ma c'harr, ma zud ha ma  
Kement tra 'welan endro d'in  
A zoug ma c'halon da bedin.

War vord an hent, ar yeoten c'hla  
A lar d'in e zo eur Mest braz,  
P'eo gwir gant e skiant, an den  
N'hallfe rei bue d'eur yeoten!

Ar vuzugen e-mesk ar fank,  
Ar big klaken war veg he brank,  
E-kreiz ar harz, ar c'hanaper,  
Pob-hini 'lar: « Gloar d'hon C'hrouer!

Gloar d'hon C'hrouer! » e leront holl...  
Ne zo 'met tud fall ha tud foll  
Ewit chom 'pad korden an de  
Hep rei meulodi da Zoue...

Ha koulskoude, n'eus 'met gwelet  
Ar burzudo 'zo war ar bed  
Hadet hep muzul gant Doue,  
Wit mad hon c'horf hag hon ine.

N'eo ket red mont da glask a-bell,  
Na deus ar gêr n'eo red tec'hel;  
Sellomp en-dro d'imp, e welfomp  
Ar burzudo braz a glaskomp.

Me 'wel, dreist ar c'hleun, ar mor braz,  
A-uz d'am fenn 'man an oabl glaz;  
An oabl a-uz, ar mor e-traou,  
Piou 'ta 'neus o c'hrouet o daou?

An heol binniget o para  
A ro d'ar bed bue ha joa;  
War ar bed, kouls ha war ma fark,  
Piou a lak e lagad ken zart?

Hag ar prenv kez war greiz an hent,  
Al loar, ar stered en oabl glaz,  
Hag ar pesked, kreiz ar mor braz,  
Ar glao, ar gliz, hag an awel  
Peb traouien, peb mene uhel,  
An erc'h, ar skorn, 'vel an tomder,  
A lar meulodi d'o C'hrouer.

Sklerder an de, an noz tenwal,  
Hag ar c'huruno o strakal,  
Ar gwe braz e kreiz ar c'hoajo,  
Er prajo glaz ar bokejo,

Ar bleunio kaer er prajo glaz,  
Hag er c'hoajo don ar gwe braz,  
Ne reont holl nemet eur vouez  
Da veuli Doue hep paouez

Al lan melen war ar c'hleunio,  
Kement tra goant a zo'n hon Bro,  
An treo holl hag al loened mud  
Ne ze gante nemet eur vrud,

Nemet eur vrud gante ne zo;  
«Ni a lar bennoz d'an Otro;  
Galloudus e, ha ni dister;  
Madelezuz e 'n hon c'henver!»

Al labourer koz a gonte  
D'e vignon yaouank e vue:  
«Triugent vla ha dek ouspenn  
Am eus, ha ma bleo a zo gwenn.

Skiant-prenan am eus tapet  
Du-man-duhont, war bop sujet;  
Ha, dre mac'h en, me a wele  
War ar bed holl 'man dorn Doue,

Breman, "bop ma tosta an eur  
Da vont da welet ma barner,  
Gwella ma c'hallan me a ra  
D'Hen meuli vel ma ra pob tra.

Berr am eus kavet ma «devez»,  
Pam eus gallet intent ar vouez,  
Mouez ma farko, gant ma hini,  
Da Zoue o rei meulodi.

Pob tra enne d'in a lare:  
«Kals poan az po bet 'n az pue;  
N'eus fors! Doue az tigollo:  
'N E Varadoz te 'ziskwizo.

Acou prezegen al labourer koz.

Ar gentel gaer-man 'moa klewet,  
Pam eus d'am zro d'ac'h he roet,  
Diwallet biken d'hec'h ankouat,  
Hag e chomfet kristenien vad.

TRAMAILH.